



CHANSON NEVE

VAR SUJET EUR C'HLOAREC

HAC E VESTREZ.

Var un ton neve.

TAD ar sperejou mad, a galon me o ped
Da rêy din sclêrijen da bosî va speret,
Da ober ur chanson entre daou zen yaouanq,
Ha d'he espligâ sclêr d'ar re a vo presant.

Qent eguet ma comancin ober ar ganouen,
Uuan anê zo mal hac un al femelen,
Hac a deuyo souden a beb eil da barlant,
An eil ous eguile, herve o zantimant.

Elevet int o daou en ur memes contre,
En ur respeti rent gant guir fidelite :

En em heuillet int bet en o bugaleach,
Ahaoue ma sevont e reont davantach.

O zud p'o deus gnelet, a ra an disparti;
Ar goas a zo casset da boursuiv e studi:
Setu int separet, e ma o studia;
Var ben daou vla goude grêt e studi gantâ.

Tri bla varnuguent ê, receo ra an urzou;
Bet ê er seminer, Bêleg sur e vezo:
Setu ar femelen bremàn abandonet,
Mantret eo he c'halon, n'en dê qet hep sujet.

Bep mintin pa zave ha pa zê da gousqet,
E teue da zonch dezi demeus he douç cloarec,
En deus grêt e studi, o c'hortos an termen
Da veza bêleguet, mes ne vo birviqen.

Monet a ra ar goas vel un den languissant,
Ha blesset e galon, da gaout e vestres coant,
Bete gout n'e dije chenchet a breposiou,
Ha laqet inutil o oll promessaou.

Ar Goas.

Bonjour dêc'h, va mestres, trist bras ê va c'halon,
O tonet ho pete gant peb affliction:
Mar deut d'am dilezel, c'houi am grêi languissant,
Ha mar bec'h fidel din e zo fin d'am zourmant.

Ar Plac'h.

E zon var an douar pemp bla varnuguent zo,
Hac e meus ententet calz eus a rêsoniou:
Dre m'oc'h eus studiet, e credàn oc'h eus c'hoant
Da zonet d'am goapât, diouallit, den yaouanq.

Ar Goas.

N'en don qet deut amàn da gonta fablennou ;
 Bezit ar vadelez da zelaou va c'homzou ,
 Ha parlantit ouzin , mar plich ganêc'h ingal ,
 Rac c'houi ameus choaset en plaç va breurial.

Ar Palc'h.

Biscoas un den honest na meus drouc-respontet.
 En em hanaout a remp hac a reomp bepret :
 Contant on da livra va c'horf ha va bue ,
 Ha goude va oll vad ar pez a meus anê.

Ar Goas.

Roet e meus da entent ha d'am mam ha d'am zad
 Ne vijen qet Bêleg , ne voa qet se d'am grat ,
 E hen d'en em angaji evit mont d'ar arme ,
 Ha bigen n'am goeljent o retorn en bue.

Ar Plac'h.

Ar pez a lavarit zo vel pa vent scrivet ;
 Mes bremân e meus hast adare da glêvet ,
 Petore respontchou oc'h eus bet , va mignon ,
 Poc'h eus anoneet dê ur gomz qen dirêzon.

Ar Goas.

Accordet e zeo din ar pez meus goulennet
 Pa garfot , va mestrez , e vezimp unisset.
 Laqit din un termen ha ne vo qet re hir ,
 Hervez ho polonte , evel moc'h eus dezir.

Ar Plac'h.

Qer bras ê va dezir ha ma zê hoc'h hini ;
 Mes na c'houlennàn qet donet da zeclari
 Ar virione qen sclêr dirazoc'h , va mignon ,
 Rac aon na ven tromplet dre un tol trahison.

Ar Goas.

Chenchomp a breposiou , ha laqomp un termen
 Da veza assamblet hep retardi souden ,
 Dre volonte Doue hac hon man an Ilis ,
 Ma chenchomp a vuez ha fin d'on yaouanqis.

Ar Plac'h.

Omp en anter ar zizun , hirio eo ar merc'her ,
 An termen a laqàn , emei , va zervicher ,
 Tennit ho paperiou var an deiz diveza ,
 Ma vezimp embannet , emei , dissul guenta.

Setu an daou zen-man demeeet hac eureujet ,
 Da uza o buez vel m'o deus prometet :
 Chanç a zouetàn dê etre ma vint er bed-mâ ,
 Ha goude o maro ar gloar da jouissa.

Ar chanson-mâ zo grêt gaut ur speret dister ,
 Natif ha domicil a goste Landreguer ,
 Demeus a vis guenver , er bêvar-varnuguent ,
 Ebars er bla c'hoezec , evit rêy da entent.

F I N.

E Montroulez , e ti LÉDAN , e traon ru ar Vur.

DISCOURS

ETRE DAOU ZEN-YAOUANQ.

Var un ton nève.

BRETONET a Vreiz-Izel, tostait da glêvet
 Ur chanson a ziscoursiou a nevez compozet,
 Grêt entre daou zen-yaouanq en em garie parfet,
 Bet int en em darempret pel bras eus a amzer,
 Tostait, asistantet, ha prestit ho silanç
 Da selaou ar zon neve, ha me ya d'he c'homañç,
 Ha e clêfot ur c'homplot entre daou zen-yaouanq,
 Pere o devoa dessign a bep eil da barlant.

Qement marichal so en Franç, hac event assamblat
 Da ober ur pèz labour, birviquen ne ve grêt,
 Qer forçus hac ar chaden demeus an amitie;
 Rac me a zo aprou mad demeus a guementse.
 Gustumout a rër qent sqêy, dont d'en em rêzoni,
 Ha qent vit en em hanaout, dont d'en em zaludi,
 Ha dre gomzou excelant e sao antretien,
 Hac a gresq a nebeudou vel ma ra ur blantenn.

Ar Goas.

Salud dêc'h, va mestrezic, ha va muya caret,
 Pel zo demeus a amzer e voan o clasq donet

Ho pete , da expliqa un nebeut proposiour ,
M'o ped , bet ar vadelez da zonet d'am zelaou.

Ar Plac'h.

Ur pec'het marvel eo din-me ober rebellion ,
Da entent ho rêzoniou , pa zoc'h den a fêçon ;
Rao comzou un den honest a vezo henoret ,
Nemet ar godisserien hac ar godisserezet.

Ar Goas.

Nan , va mignonez fidel , birviqen ne ràn se ,
Contant on da rêy ar merq demeus va amitie ,
Hac ho lezel da zispos , evel ma tezirfet :
Biqen marc'hat na doràn a guement ho pe grêt.

Ar Plac'h.

Dont a rit d'am oblîja da laqat va fizianç ,
Ma larit ar virione , me zeuy d'en em avanç
D'ho carout a dra certain etre ma vin er bed ,
Na biqen ne zislaràn , p'am bezo prometet.

Ar Goas.

Deut eta , va mestrezic , d'am lemel a vizer ,
Ha grit ur zel a druez , bez oc'h eus ar pouer ,
Ous ur galon languissant , ha deut d'e zoulagi ,
A zo risqet da veza beuzet en e anui.

Ar Plac'h.

Poan ameus eus ho credi , emei , va zervicher ,
Em be bet digaut Doue er bed-màn ar pouer
Da laguissa ho calon er guis ma leveret :
Mar don coz a guementse , e viot soulajet.

Ar Goas.

Ne ouffe den invanti ar boan hac an tourmant,
 Goude beza accuset, en deus an den yaouanq
 D'an hini a gar muya varlerc'h Doue er bed,
 Ha laqat ar gassoni e plaç ar joaüstet.

Ar Plac'h.

Neb o deus grêt qementse, n'o deus qet gonezet,
 Ar goel dêodou milliguet biscoas n'en int manqet;
 List qementse da dremen : an accusation
 A zo grêt en fossamant ac'hanoc'h, va mignon.

Ar Goas.

Me a el en assuri : hac e ven o vervel
 Me meus lezet pepini da roula e guentel;
 James nemeus qemeret nep sort sourci var den
 Abaoue ma zon en uzach, na ne rin birviqen.

Ar Plac'h.

Ho pedi ràn humblamant da chanch a preposiou,
 Ha ne zeut qet da gredi langach ar goel-deodou;
 Ne guemeront plijadur nemert o troug-ober;
 Deus se e maint o veva, ennes eo o dever.

Ar Goas.

Qent evit dispartia, e meus c'hoant da glêvet;
 Inoui a ràn, va mestrez, o tont d'o tarempret,
 Hep clêvet eus ho qinou ur propos excelant,
 Em laqa en esperanç da gaout soulajamant.

Ar Plac'h.

An nep a ya re vuan, james ne c'honc qet
O vont var e gorreguez e qav goel e amplet,
O pije al liberte da zont d'am godissa,
Rac mare'hadourez ollret zo dies da verza.

Ar Goas.

Hirio e ranqan cavet va zetane evit mat;
Eru eo sur an amzer ma clêvin ma mennat;
Rac ne meus qet a repos, nac e nos nac en de,
Ma n'o pet ar vadelez da gaout ouzin true.

Ar Plac'h.

Pa zomp choazet gant Doue da veza unisset,
Dêc'h e zeo er poursuivi : commancit pa garfet :
Achuomp hor bromessa, finissomp hon anui
Qen a blijo gant Doue donet d'hor separi.

Ar Goas.

Bars en diveza couplet, selaouit hep appel,
Ar chanson so composet en dri a vis Ebrel,
Er bla mil eis cant trivac'h, evit expliqa sclêr,
Ma hallo an oll entent er suit eus an amzer.

F I N.

E Montroulez, e ti LÉDAN, e traon ru ar Vur.